

*YF\_0079\_Ne oeran ket petra ‘m-eus graet*

Ne oeran ket petra 'm-eus graet  
D'am dousig koant p'emañ fachet

Laret oe dezhi am-boe ur si  
War-lerc'h unan am-boe daou pe dri

Laret oe dezhi e oen butuner  
Ul lonker jistr, ur merc'hetaer

An hini en-eus laret an dra-se  
N'en-eus ket laret ar wirionez

N'en-eus ket laret ar wirionez  
Nemet un hanter-gaou iveauz

Na ma evan hag ober a ran  
Arc'hant am-eus ha pean a ran

Plijoud a ra din ar chopinou  
Hag ar merc'hed koant a-wechou.

Je ne sais pas ce que j'ai fait  
A ma douce pour qu'elle soit fâchée

On lui avait dit que j'avais un défaut  
Après un j'en ai eu deux ou trois

On lui avait dit que j'étais fumeur  
Buveur de cidre et coureur de filles

Celui qui a dit cela  
N'a pas dit la vérité

Il n'a pas dit la vérité  
Mais un demi-mensonge

Si je bois et je le fais  
J'ai de l'argent et je pais

J'aime les bouteilles  
Et les jolies filles quelquefois.